

YF_0043_Ar Martolod Yaouank

Kenavo ma zad ma mamm, kenavo mignoned
Kenavo deoh tud yaouank, deuz parrez Langoned

Ne oa ket roet din da choaz, red e oa din partian
Kaset e oen war ar mor braz, kuitaad ma Breiz-Izel

Me a oa me gwall glaharet mond d'ober ma servij
Laosket am-boea e-barz Langoned, fleurenn ma yaouankiz

Losket am-boea e-barz ti he mamm, ma mestrezig karet
Kaset e voen d'An Oriant, ha du-ze e voen gwisket

Roet e oa din eun habit hlaz, evel ar vartoloded
Evid mond war ar mor braz, pell euz douar benniget

Ma mamm a bede Sant-Erwan, patron ar pesketour
Da ziwall he mab yaouank, keit ha ma vije bet war an dour (keit ma vije war zour)

Ober a ris ma 'finijenn, diouz mintin beteg noz
O servij ma hapiten, o sonjal er vro goz

Eun nozvez da hanter eost, euz kreiz ma batimant
Gweled a ris me ma mestrez, e ma bro Mor-Bihan

Daelou a oa em daoulagad, an avel a oa uhel
E-barz an nenv e oa stered, a daole din sklerijenn

Ma vijen bet er skolajou, am-bije skrivet eul lizer
Evid kontan ma oll boaniou, ha ma brasan miser

Tremenet e oa daouzeg miz abaoe pardon Chapel
O toned deuz an iliz, am-boea prenet eur walenn

Roet am-boea anezi da Vari-Jan, he a lavaras din-me (Roet 'moa 'nehi
Keit ha ma vloh er rejunant, deoh e vin-me fidel

Med abaoe ma 'z on partiet, n'eus ket bet doareou
Euz ma 'farrez Langoned, ha bemnoz e raen sonjou

Med fin a oa bet d'ar voyajou, erru e oa an nevez-amzer
Tostaad a raen euz ar vro, echu eo ma honje

An eostig a zave da lein, a gane meuleudi
Kavet ganin Breizh-Izel, erru e oan em zi

Demad ma zad, demad ma mamm, echu eo ma honje
O servij ar gouarnamant, graet am-eus ma dever

Triwec'h miz trenne a dour, hep gweled eur hristen
Eh an da lavared bonjour beteg ti ma fulenn

Ar hentan den am-boea kavet a oa ar vatezig vihan
Ha ganti am-boea goulennet bar menn ma plac'h yaouank

Ema-hi du-ze e-barz ar zal vraz e-touesk ar yaouankiz
Sonerien ema-hi o hortoz evid mond d'an iliz

Hag o kleved kemed-all, e oan chomet souezet
O haloupad d'ar penn ker all, ha du-ze am-boea gwelet

Visajenn wenn evel eul lien e welen ma mestrez

Mond da daol ar zakramant evid ar briedelez

Setu petra a oa degouezet gand martolod yaouank
O sonjal e-barz ar merhed a-raog mond d'ar rejumant

Selaouit kamaraded, setu aze eun aviz
Na sonjit ket e-barz ar merhed ken a vo graet ho servij